

WAR ZAO !

War zao ! va breudeur, dao eo sevel,
Ar paour zo dùi gant an naon.
Ar skiant a lar a-vouez-uhel
'N em ganna start, skei hep tamm aon !
Skuiz omp aet, re bell omp bet deñved,
Mevelien gaez, war zao ! war zao !
Eur béd all gwelloc'h a vo savet
'Lec'h ma vimp mestr 'lec'h beza sklao.

DISKAN

Deomp d'an emgann diweza
Holl war zao ! ha warc'hoaz
E kerzo unanet
Ar poblou skoaz-ouz-skoaz.

Diou wech.

490

AR PILHAOUER

Va zad en deus va dimezet
Gant eur flerius pilhaouer ;
E Lokeoret ez eo ganet,
E koumanant Toull-al-Laer.

Foei, foei, foei, va zammik aotrou
Gant e stoup hag e bilhou.

Tri devez goude va eured
E oa foar e Landerne,
Ha va lapous prim dihunet
A zailh 'mèz eus e wele.

Drailha ra eun hanter pater,
Tana ra e gorn-butun,
Tapout a ra e grog-pouezer
Ha yao kuit war hent Sizun.

Pa oa hanter-noz sonet
En iliz bras ar Fouilhe,
Me oa intanvez glac'haret
Va unan 'barz va gwele.

Kavet en doa kamaladed,
En eur vont da bilhaoua,
E holl arc'hant en doa foetet
Ha tamm pilhou 'bet n'en doa.

Pa ya Yannig d'ar pardonieu
Atao e vez mezo-dall
Prest e oa da goll e vragou
E Kastellin an deiz all.

Pa zeuio ar c'hiz er vro-man
Da dorri an dimeziou,
Me a yelo en eur gana
Pell deus pötred ar pilhou.

Pa zeuio karrig an Ankou
D'ober e dro er vro-man,
Me a gerzo war e roudou
Hag hen pedo d'her samma.

Komzet vo d'an aotrou person
Deus ar flerius pilhaouer,
'Vit ma kano al Liberon
Hag ouspenn al Lip-e-rer.

FANCH AR PAOTR KRENV

Fanch ar pôtr krenv hag e vignon
Oa tont d'ar gêr eus ar pardon.

Tra la la, la la la la la
La lam tra, tra la, la lam tra.

Digouezet ganto tri aotrou
Bet o vale war ar mêziou.

Ar re-man zouge leviten,
Tog kern-uhel war gern o fenn,

Chupenn lost-pig ha bragou berr,
Gouest d'ober mez d'eur c'hemener.

O moustachou a oa sired,
Frizet, troiset ha pomponet.

Hag en o dorn peb a vaz skañv,
Gasent en-dro en eur gana.

Ha pa weljont an daou bôtr mat
Ee'h en em lakjont d'o goapaat :

« Les pommes de terre pour les cochons,
Les épilchures pour les Bretons ! »

« Petra deus c'hoant, eme Fanch kre,
Da baka 'n tri lakepot-ze ? »

Hag hen mont d'ezo goustadik
Ha tapa krog en o lost pik.

Gant eun töl dorn war greiz e gein
E strink unan war ar bern mein ;

Gant eun töl dorn diwar e fri,
E stlap eun all e-touez ar pri ;

Gant eun töl troad e-kreiz e ... rer,
E stlap eun all e-barz ar ster.

« Me zesko d'eoc'h, eme Fanch kre,
Dont d'ober goap deus ouzin-me. »

Ha neuze Fanch o vont d'ar gêr
O kana son ar pilhaouer !

Kousk Breiz-Izel

An heol a zo kuzet, setu echu an de ;
Me glev ar c'hloc'h o tintal an ave.

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
Setu an noz o tont war an douar,
Kousk, Breiz-Izel, bro ken mat,
Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat.

C'houez vat an ed e bleuñ hag al lann alaoüret,
War ar mêziou gant ar gliz noz a red.

Ar veserien a gan o tastum o loened,
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrouz, me glev kan an eastig,
Telenner noz, sonit flour ha dousik.

Breiz-Izel, douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar.

Son ar Goulenn-Eured

Bonjour bonn' femm', roit (1) ho merc'h d'in, o !
Bonjour bonn' femm', roit ho merc'h d'in,
Ne vo ket maleürus ganin !

} 2 wech

Me yai d'ar park da labourat, o !
Hi 'jomo 'r gêr da luskellat !

Da luskellat ha d'ober tan,
Da domma yod d'an 'ni bihan.

Me vo kontant fin ar sizun,
Ma c'hellan kaout va zamm butun.

Va zamm butun ha dek kweneg,
C'houlennin ken digant va gwreg.

Ha me vo fur betek mervel,
Ma c'hellan kaout ho merc'h Katell !

— Va fôtrig kêz, va merc'h Katell
Ne vo ket roet (2) d'eun den diboell !

D'eun den diboell ha d'eur feneant,
D'eul lonker chistr ha gwin-ardant !

Ar bleo 'zo savet en da zorn,
Kerz da rosti 'barz an ti-forn !

Da chakochou (3) zo goullou-sac'h !
Kerz d'eul lec'h-all da glask eur plac'h !

(1) e Kerne : *grit*. — (2) e Kerne : *grêt*. — (3) pe : *da c'hodellou*.